

476

D'an Autrou Flo,  
 eus a Lesneven,  
 Chef bataillon ar zouavet,  
 Da behini Lesnevennis o deus roet eur banquet  
 ar 22 eus a vis geryu 1841.

(408)  
~~scrite~~

Var ton : J'ons un curé patriote.

Autrou Flo, plijet ganeoc'h  
 Ma teñsa, er gür Breton,  
 Gant levenez da offr deoc'h  
 Va hommach a greiz calon.  
 Trida 'ra ar goad em c'heiz  
 Pa veulân haroet Breiz:

Autrou Flo, autrou Flo,  
 C'hous a ra enor d'hor brö,  
 Enor d'hor brö, enor d'hor bro!

(409)

Er penn d'emeus ho rejimant  
 C'hous a voe e peb amzer  
 Hanavezet Breton vaillant  
 Er gombatjou en Alger.  
 Bez' oc'h eus d' Abdel-Kader  
 Meur a vech lardet e lèr....  
 Autrou Flo, &c.

Centimuit hirvisiqen  
 Da zisqez d'ar forbanet  
 E zoc'h buquel a Lesneven,  
 Ha dre ze en Breiz ganet.  
 A viscoas Breiz-Ivellis  
 A voe leun a vaillantis.  
 Autrou Flo, &c.

Gant joa vras eo e velomp-ni  
 Ar stereden a enor  
 Var ho peultrin o luquerni,  
 Pini gant gloar ho tecor,

(410)

477

C'houi voe scuër e peb amzer  
 D'an Americanet ger.  
 Autrou Flo, de.

Enor ha gloar ive ra vo  
 Er memes amzer rentet  
 Da zoudarded vaillant hor brô  
 Zo 'velloc'h n'em distinguet:  
 Autroue Booleou, Penper,  
 Champeaux ha Lamoricier,  
 Potret reiz, potret reiz,  
 Evelloc'h bugale Breiz, bugale Breiz, bugale Breiz.

(411)

Gloar anfin d'an oll Vretonet  
 Zo ebans en Algeri,  
 Ha grâc deo da rei da zonet  
 D'ar Bedouinet var o fri.  
 Laqit, potret c'hoek a Vreiz,  
 An tanfinfoëtr ey o c'hreiz....  
 Gloar bepret, gloar bepret  
 Ra vezo d'ar Vretonet  
 D'ar Vretonet, d'ar Vretonet!

O gæric coant a Lesneven  
 Ho pet memor en peb reiz  
 Eus a vignonet ancien,  
 Conscriet ar bloavez reiz:  
 Condamin, Ar Feur, Poilpre,  
 Vaumouss, noe ho pugale. (1)  
 Potret woesek ha geuziet,  
 Ni 'r bo sonch ourzoc'h bepret,  
 Bepret, bepret, bepret, bepret.

fin.

A. Lédan.

(Vol. IV, p. 408-411.)  
 7 str. numérotées.

(1).- Er zerrich e ramp assambles.